

332 A li



CHANSON

AR SOUBEN LES-GUIN-ARDANT

En eur gommanç canan, excus a c'houlenan
Digant quement hini a so present aman.
Abeurs eun oc'h yaouanc, din a oa ordrenet
Rei dezan souben les, nos quantan he euret;

Mes en lec'h souben les, me rei dac'h da danvad,
Malaga ha champagn, liqueurio dilicad
Biscoas ne oa evet 'sort gante bars ar vro.
Me meus gret ho digaç expres deus a Vordeaux.

Na neus princ, na baron, roue, nag empereur
A guement a nefe tanveet ma liqueur,
Pa zon deuet expres evit ho regali,
An tanva quantan a so d'ho pried ha c'houi.

An eil tanva a so dan daou zen a henor
A neus ho conduit eus tol hon Redemptor
An drede tanva nei so do mam ha do tad,
Pere a neus glac'har ho tonned do couitad;
Dar bervet a pedan breudeur ha c'hoareset,
Quement hini ho car, querenet ha mignonnet,

AR PES SO AMAN VOAR LERC'H A VE PROPR DA GANAN

EUS TOL DA EUN EURED

An deves a hirio, pebes contantamant,
Goelet an diou famill, ha quement so present,
Aman nem assamblet, gant cals a garante,
Diredet ol gant joa d'henori an dud neve,

Unan a c'houlen crampoës
Hac eun al gallettes
Eun al so en he gavel ho clasq donet er mes

Ar vreg so dre an ti
Vel pa ve etourdi
Na neus den evit clevet raison vad ebet ganti.
Fachet hen deus he fried,
Adieu d'an amourouset.

Tud yaouanc, mar em c'hredet,
Lacaït eves, diouallet
C'houi he an evurusan tud a so voar ar bed.

C'houi so dre ar pardonniou
Ha dre an assambleou
O dansal, o c'hebattal, o c'hefan taquennou.
Eun den yaouanc, mar gue fur,
So parfet he blijadur.

Hac ar re so dimezet
An darn vuyan meus goelet
A vanque eun dra benag dalc'hmad do evurustet.

Darn so hac a laer ar yalc'h,
Ha darn al e ya voar varc'h,
Real a gar ar chopin, quen a vont mev eoalc'h.
Tud yaouanc, mar dimezet,
Choaset tud fur ha parfet.

PA HI LERER EN EUN EURED A HELLER AJOUTI

He neur dont da finissan
Souhaiti ferm a ran
Yec'het dan daou zen neve, chans ha prosperite.

Men ho ped, camaradet,
Vit eur farç ne fachet quet;
Permettet a badinal en tre ar vignonet.

Graç dimp da nem gavet c'hoas
Joaus evel biscoas
Ben an de-ma pen eur bla, ebars ar memes plaç,
Ho stringuan gant hon goeren
Da yec'het ar poupon.

LENEINDRE.